

Tud ar vro - Bro Leon
Roll kanaouennoù - Dañs round

P'edon er gêr bihanig

P'edon er gêr bihanig *Gé Marivon luré*
Er gêr e ti va zad, *Marivon luretig*
Er gêr e ti va zad, *Marivon luré*

Me 'oa kaset d'ar skolaj,
'Vit bezañ desket mat

Evit deskiñ ar galleg,
Pa ouien ar brezhoneg.

Pa deuas poent da vediñ
Em boa kerc'het d'ar gêr

En aviz mont da bardon,
Da bardon Sant-Mikael,

Me 'glask ur c'hamaradig,
Da vont 'sambles hon daou,

Na pa errujomp eno,
Echu ar gousperoù,

Ha me [o] vonet da bourmen
Dre holl ar gouelioù.

Me 'glevas div blac'h yaouank,
'La[va]ret an eil d'eben,

" Hemañ kaerañ paotr yaouank
'Zo [e] pardon Sant-Mikael "

Hag e teujont d'am fed
Da vont d'o c'has d'ar gêr

Koulskoude [e]'z aemp ur pennad
Non pas betek an ti.

P'oamp aet ur pennadig
Savas komz dimeziñ.

Ma 'm bij[e] bet c'hoant dimeziñ,
Me 'oa dimezet mat,

Gant ur bennhêrez yaouank
Deus [a-]gichen ti va zad,

Met hi 'lavaras din-me
'oa merc'h un tieg bras.

Ha pa oan bet da welet,
Siwazh! n'he doa netra.

Nemet ur c'hozh kanastell,
Div skudell ha teir loa.

Hag ur c'hozh gwele gwial
Evit kousket eno.

Setu on c'hoazh paotr yaouank
War va studi bremañ